

OFIS PUBLIK
AR BREZHONEG



AR BREZHONEG E BED AL LABOUR E 2022

OFIS PUBLIK AR BREZHONEG
ARSELLVA IMPLIJ AR YEZHOU
2023

Hentenn labour

E 2006 en doa graet Arsellva implij ar yezhoù un enklask kentañ war *Ar postoù-labour hag ar brezhoneg*. E 2012 e oa bet graet an enklask un eil gwech. Hizivaet eo bet e 2022 evit an 3^e gwech gant ar pal **anavezout stad an traoù** d'ar 1^{añ} a viz Genver 2022 (an niver a bostoù-labour a oa warno brezhonegerien evit kefridioù ma ranker gouzout brezhoneg) ha **muzuliañ an emdroadurioù**.

Bewech ez eo **an niver a bostoù-labour kevatal da implijoù leunamzer (KILA)** a zo bet goulennet ; kement-se a dalvez eo c'hoazh brasoc'h an niver a dud implijet, dre ma labour darnamzer lod eus an dud.


Kaset eo bet ar c'houlennaoueg da dremen 800 framm (kevredigezhioù, embregerezhioù, strollegezhioù tiriadel, h.a.), frammoù a ouzer e enfredont pe e c'hallfent enfredañ brezhonegerien. Graet eo bet e-doare da gaout respontoù gant an holl frammoù a-bouez. Da-heul, ha pa vankfe respontoù frammoù bihan zo marteze, ez eo gwirion ar sifroù embannet amañ hag e c'hallont bezañ keñveriet gant re 2012.



1 850 post-labour brezhonek e 2022

1 832 bost-labour KILA zo bet renablet gant Arsellva implij ar yezhoù da-geñver an enklask. Pa gemerer e kont an nebeud postoù en o-unan a c'hall bezañ aet hebiou d'an enklask, e c'haller lavaret ez eus e 2022 **1 850 post-labour KILA bennak** warno brezhonegerien evit implijoù a c'houlenn gouzout ar yezh da vat.

Dasparzh diouzh ar rumm micher¹



Evel en enklaskoù all, stadañ a reer **emañ ar pep brasañ eus ar postoù e bed ar c'heleñn** : 1476 post, da lavaret eo 4 fost diwar 5 (81%). **Tost an hanter eus hollad** ar postoù (49%) a glot gant ur vicher resis, **skolaer en hentadoù divyezhek**. Er rummad-se e kaver ivez kelennerien eil derez (12%) pe “postoù all ar c'heleñn” (16%) a glot dagentañ gant skoazellerien-vamm pe skoazellerien war an deskadurezh en eil derez met ivez gant tud a vicher e bed ar vugaligoù ha gant emellerien diavaez a ginnig abadennoù brezhoneg e klasadoù unyezhek. Ar rummad kelenn goude ar vachelouriezh (4%) zo ennañ stummerien evit an dud deuet, dreist-holl, hag ivez kelennerien en deskadurezh uhel.

An eil rumm micher a implij ar muiañ a dud goude ar c'heleñn a denn d'**ar merañ frammoù** (renerien, sekretourien, kontourien, teuliourien, karget a gefridi, h.a.) gant 200 post-labour bennak e 2022. Ar pep brasañ eus ar postoù-se a gaver e-barzh kevredigezhioù (60%) met tost 1/3 a dalvez evit ar velestradurezh foran (32%) ; an embregerezhioù ne bouezont ket kalz en dasparzh (8%).

Ar postoù all zo dasparzhet etre ar mediaoù² (3%), ar sevenadur³ (3%), an arzoù hag an arvestoù (2%). Bihan-bihan eo pouez rummad ar greanterezh, artizanerezh ha kenwerzh

¹ Ar rummoù micher implijet aze a denn da gefridioù pennañ ar postoù renablet.

² Kazetennerien, luskerien abadennoù er skingomz pe er skinwel.

(1%) met ret eo stadañ eo diaes-kenañ priziañ an dachenn-se hag ar sifroù a c'hall bezañ bet ispriziet. Ur rumm micher a vank er grafik a-us eo hini ar yec'hed hag ar servijoù d'an dud : e 2022, n'eus bet kavet nemet 1 post er rummad-se e-skoaz 11 e 2012. An dalc'h eo dreist-holl n'eus bet dastumet respont ebet er metoù-se met ne dalvez ket n'eus post ebet. Etre 10 hag 20 post KILA a zle bezañ war an dachenn-se e gwirionez.

1 300 post bennak a oa bet renablet e 2012. War-dro 550 post-labour ouzhpenn a gonter e 2022 da lavaret eo **ur c'hresk etre 42 ha 44% en ur ober 10 vloaz. Kadarnaet eo gant an enklask e kresk buan bed al labour e brezhoneg.**

Emdroadur dasparzh ar postoù dre rumm micher

Rummoù micher		2012	2022	kresk	pouez	
Micherioù ar c'helenn	Kelenn 1 ^{añ} derez	603	901	49,4%	49%	81%
	Kelenn eil derez	191	212	11,0%	12%	
	Kelenn goude ar vachelouriezh	64	76	18,5%	4%	
	Kelenn (postoù all)	155	287	84,5%	16%	
Micherioù all	Merañ ar frammoù	131	197	50,5%	11%	19%
	Sevenadur	36	49	37,7%	3%	
	Arzoù hag arvestoù	18	32	75,7%	2%	
	Mediaoù	44	55	24,7%	3%	
	Greanterezh, artizanerezh, kenwerzh	18	22	19,5%	1%	
	Yec'hed ha servijoù d'an dud	11	1	-90,9%	0%	
Hollad		1271	1832	44,0%	100%	100%


Stabil-kenañ eo chomet dasparzh ar postoù etre ar rummoù micher en ur ober 10 vloaz. A-boan kresket eo pouez lodenn micherioù ar c'helenn (81% e-skoaz 80% eus ar postoù e 2012) koulz hag hini ar merañ frammoù (11% e-skoaz 10%). Kement-se a ziskouez, ha pa vefe diorren an hentadoù divyezhek keflusker bed al labour e brezhoneg, ez eus lusk gant an tachennoù all ivez.

Gant micherioù ar c'helenn emañ ar brasañ niver eus ar postoù ouzhpenn, a-drugarez da ziorroidigezh an hentadoù divyezhek da-gentañ. **Niverusoc'h eo ar postoù skolaerien dreist-holl (+300 post**, da lavaret eo +49% en ur ober 10 vloaz). **Ur souezh eo avat e vefe kresket ken nebeut an niver a gelennerien en eil derez** avat (212 e-skoaz 191, +11% en ur ober 10 vloaz). Digresk-bras zo bet gant ar c'helenn diret abaoe an enklask kozh (-36% a skolidi en eil derez en ur ober 10 vloaz) met kreñvaet eo bet poblañs an hentadoù divyezhek er memes koulz (+41% a skolidi en eil derez). Ar roadennoù dastumet a ziskouez n'eus nemet e Diwan eo kresket an niver a bostoù en eil derez etre 2011/2012 ha 2021/2022, chomet eo stabil en hentadoù all ; **ma n'eus ket muioc'h a bostoù ouzhpenn en eil derez eo, evit un darn vat, peogwir n'eus ket bet doujet ouzh pennaenn parder an eurioù kelenn en eil derez divyezhek.**

Ur c'hresk bras zo eus tu "postoù all ar c'helenn" (+84%) met chañsoù zo e vefe bet klokoc'h an dastum evit bed ar vugaligoù hag evit ar skoazellerien-vamm eget 10 vloaz zo.


³ Metoù ar buheziñ sevenadurel alies, met tremen 1/3 eus ar postoù-se a denn d'ar yezh hec'h-unan : troerien, dastumerien, h.a.

Emdroadur an niver a bostoù kelennerien divyezhek



Kreskiñ a ra an niver a bostoù kelennerien divyezhek abaoe m'eo bet diazezet an deskadurezh divyezhek er bloavezhioù 70. **En tu all da 1 100 post kelenner** zo er 1^{añ} hag en eil derez gant an 3 hentad bremañ.

Dasparzh diouzh ar rumm micher ha dre zepartamant




Notenn : a-genfeur gant an niver a bostoù e pep tiriad eo pep kelc'h

Penn-ar-Bed eo an departamant ennañ ar muiañ a bostoù brezhonek, heuliet eo gant ar Mor-Bihan ha, goude, gant Aodoù-an-Arvor hag an Il-ha-Gwilen ; al Liger-Atlantel zo muioc'h en a-dreñv. Micherioù ar c'helenn a ya d'ober ar pep brasañ eus ar postoù e pep departamant. Gant se, bras eo levezon stad diorren ar c'helenn divyezhek war dasparzh ar postoù dre zepartamant.

Micherioù ar c'helenn a dalvez war-dro 80% eus ar postoù e Penn-ar-Bed (79%) hag en Aodoù-an-Arvor (79%) evel e Breizh dre-vras (81%). Uheloc'h c'hoazh eo o fouez er Mor-Bihan (87%) hag el Liger-Atlantel (86%). **Un tammig liesseurtoc'h eo dasparzh ar postoù en Il-ha-Gwilen** (74% a bostoù nemetken evit micherioù ar c'helenn). Ar frammoù a-vent gant ar rannvro hag ar c'hevredigezhioù micherelaet staliet e Roazhon a c'hoari kalz war disoc'h an departamant-mañ. Neoazh, en e fonnusañ eo bet diorren ar c'helenn divyezhek en Il-ha-Gwilen er bloavezhioù diwezhañ, ar pezh en deus lakaet pouez postoù ar c'helenn da greskiñ ha neuze da dostaat ouzh keidenn Breizh (+8 poent en ur ober 10 vloaz).

Emdroadur pouez pep departamant e bed al labour e brezhoneg



Kresket eo an niver a bostoù en holl zepartamantoù. Damheñvel eo chomet dasparzh ar postoù etre an departamantoù e-keñver 10 vloaz zo. Cheñchet eo pouez 2 zepartamant memes tra.

Penn-ar-Bed eo an departamant pouezusañ e bed al labour e brezhoneg atav met digresket eo e bouez en dasparzh un tammig (-1,8 poent) hag e talvez bremañ un tamm nebeutoc'h eget an hanter eus ar postoù (49%). En enep, **an niver a bostoù en Il-ha-Gwilen eo an hini zo kresket ar muiañ** (+78%) ha 2,1 poent zo bet gounezet gant an departamant en dasparzh.

Sifroù pennañ dre zepartamant hag emdroadurioù e-keñver 2012

	Postoù KILA renablet e 2022	Niver a bostoù ouzhpenn	Feur kreskiñ	Lodenn micherioù ar c'helenn er postoù ouzhpenn
Aodoù-an-Arvor	274	+84	45%	68%
Penn-ar-Bed	898	+253	39%	82%
Il-ha-Gwilen	207	+91	78%	85%
Liger-Atlantel	81	+22	38%	86%
Mor-Bihan	372	+110	42%	93%

Lennadenn : e Penn-ar-Bed ez eus bet renablet 898 post KILA, ar pezh a zo 253 fost ouzhpenn e-keñver sifr 2012 hag ur c'hresk par da +39%. Lodenn micherioù ar c'helenn en niver a bostoù ouzhpenn a sav da 82% (207 post diwar 253).

E Penn-ar-Bed eo bet krouet ar muiañ a bostoù (+253) heuliet gant departamantoù all akademiezh Roazhon (etre +84 ha +110 post). Al Liger-Atlantel a chom muioc'h en a-dreñv (+22 bost nemetken) ; an troc'h melestradurel a ziaesa diorren an hentadoù divyezhek hag ar c'hrouiñ postoù-labour brezhonek dre-vras.


Kalz buanoc'h eo kresket an niver a bostoù en Il-ha-Gwilen (+78% en ur ober 10 vloaz) eget en departamantoù all (+41% ent keitat). E Penn-ar-Bed eo bet ar c'hresk en e c'horrekañ (+39% hepken) goude hini al Liger-Atlantel (+38%). An tuadurioù-se a c'haller tostaat



ouzh ar re a verzer e sifroù ar c'helenn divyezhek : da-heul an emglev Stad-Rannvro bet sinet e 2015 eo bet kreñvaet al lusk krouiñ lec'hioù divyezhek e departamantoù akademiezh Roazhon, nemet e Penn-ar-Bed ha tuet eo e sifroù da emdreiñ goustadikoc'h er bloavezhioù diwezhañ. En enep, an emglev-se en deus fonnusaet lusk diorren ar c'helenn divyezhek en Il-ha-Gwilen ha rouedad an departamant he deus adaptet ul lodenn vat eus he dale dindan un nebeud bloavezhioù. **Ma kendalc'her gant ar memes tuadurioù e vo muioc'h a bostoù brezhonek en Il-ha-Gwilen eget en Aodoù-an-Arvor ac'hann da greiz ar bloavezhioù 2030.**

Bras eo lodenn micherioù ar c'helenn en niver a bostoù ouzhpenn e pep tolead met disheñvelderioù a verzer eus an eil departamant d'egile. En he bihanañ emañ al lodenn-se en Aodoù-an-Arvor (68%). Ret eo kompren neuze ez eus bet krouet muioc'h a bostoù er-maez eus tachenn ar c'helenn en departamant-se eget e lec'h all. **An departamant nemetañ eo m'eo kresket liesseurted ar postoù** e-keñver 2012 : brasoc'h eo lodenn ar postoù er-maez eus tachenn ar c'helenn (21% e 2022) eget 10 vloaz zo (16%), a-drugarez da frammoù kevredigezhel o deus krouet postoù pergen. **An Il-ha-Gwilen a chom memes tra an departamant m'emañ bed al labour e brezhoneg en e liesseurtañ** : 26% eus ar postoù ne dennont ket d'ar c'helenn. En enep, **n'eo ket aes-tre kavout labour e brezhoneg er Mor-Bihan er-maez eus bed ar c'helenn** : pouez micherioù ar c'helenn a oa en e vrasañ eno dija 10 vloaz zo (85% eus ar postoù) hag aet eo war greñvaat c'hoazh (87% e 2022).

Dasparzh dre vro



Ouzh Breizh a-bezh e sell bed al labour e brezhoneg. 24 bro diwar 28 zo bet renablet postoù eno, da lavaret eo 4 bro ouzhpenn⁴ e-keñver 10 vloaz zo a-drugarez da ziorren ar c'helenn divyezhek. N'eus mui nemet 4 bro ma n'hon eus renablet post-labour brezhonek ebet, an holl anezho el Liger-Atlantel.

Brasoc'h eo an niver a bostoù-labour er c'hornôg hag en-dro da gêrioù Naoned ha Roazhon, kalz bihanoc'h eo war ar maez e Breizh-Uhel c'hoazh.

Bro Kornôg Kreiz-Breizh eo ar vro m'emañ liesseurtes ar postoù brezhonek en e uhelañ (36% er-maez eus micherioù ar c'helenn), heuliet gant bro Sant-Brieg (33%) ha bro Roazhon (32%). Izel eo al liesseurtes-se e broioù heverk evel re Montroulez (6% er-maez eus micherioù ar c'helenn nemetken), bro Kêr-Wened (12%) pe bro an Oriant (13%). A-hend-all, pa vez nebeut a bostoù en ur vro e tenn ar re-se d'ar c'helenn da-gentañ-penn (9 bro zo enno postoù kelenn hepken).

⁴ Bro Breselien, bro Traoñiennoù ar Gwilen, bro Kreiz-Breizh ha bro Felger.


Sifroù pennañ dre vro hag emdroadurioù e-keñver 2012

	Postoù KILA renablet e 2022	Feur kreskiñ	Pouez ar vro e dasparzh ar postoù
Bro Brest	417	25%	22,8%
Bro Gerne	290	78%	15,8%
Bro Roazhon	168	65%	9,2%
Bro Kornôg-Kreiz-Breizh	132	41%	7,2%
Bro Kêr-Wened	126	40%	6,9%
Bro an Oriant	121	63%	6,6%
Bro Gwengamp	111	81%	6,0%
Bro Montroulez	87	14%	4,7%
Bro Dreger	83	0%	4,6%
Bro Naoned	70	47%	3,8%
Bro an Alre	63	65%	3,4%
Bro Pondi	44	3%	2,4%
Bro Sant-Brieg	40	80%	2,2%
Bro Gwitreg	12	515%	0,7%
Bro Redon	12	10%	0,7%
Bro Dinan	11	46%	0,6%
Bro Ploermael	9	-16%	0,5%
Bro-Wenn hag ar Briver	6	-4%	0,3%
Bro Sant-Maloù	6	147%	0,3%
Bro Traoñiennoù ar Gwilen	5		0,3%
Bro Breselien	5		0,3%
Bro Kreiz Liger-Atlantel	4	8%	0,2%
Bro Kreiz-Breizh	4		0,2%
Bro Felger	2		0,1%

Digemm eo urzh ar 5 bro bouezusañ e bed al labour e brezhoneg. Bro Brest eo ar vro enni an niver brasañ a bostoù brezhonek (tost da 420 post renablet), heuliet gant bro Gerne (290), en 3^e plas emañ bro Roazhon (170), heuliet gant bro Kornôg-Kreiz-Breizh (135) ha bro Kêr-Wened (130). Bro an Oriant (120) ha bro Gwengamp (110) a zeu da glokaat roll ar 7 bro enno en tu all da 100 post (ne oa nemet 3 bro en degouezh-se 10 vloaz zo). Damheñvel eo dasparzh ar postoù etre ar broioù ouzh ar pezh e oa e 2012, nemet eo digresket pouez bro Brest (-3 foent) ha bro Dreger (-2 boent) tra m'eo kresket hini bro Gerne (+3 foent) dreist-holl.

Kreskiñ a ra an niver a bostoù en holl vroioù, koulz lavaret. Ar c'hresk kriz uhelañ eo hini bro Gerne : +127 post KILA ouzhpenn en ur ober 10 vloaz (e-skoaz +56 etre 2006 ha 2012) ; adtapet he deus ar vro-se un tamm eus he dale war bro Brest. 3 bro o deus bet ur c'hresk heverk par da 80% (broioù Gwengamp, Sant-Brieg ha Kerne), 3 all unan tost da 65% (broioù Roazhon, an Alre hag an Oriant). Eus an tu all, **n'eo ket emdroet an niver a bostoù e-doug 10 vloaz e bro Dreger**, bro Pondi ha Bro-Wenn hag ar Briver hag un digresk zo e bro Ploermael.

Dasparzh dre DPKE⁵



Evel ma c'hortozer, Brest Meurgêr eo an DPKE kentañ evit an niver a bostoù brezhonek (200 post bennak), heuliet gant Kemper Breizh-Izel (155 post) tost a-rampo gant Roazhon Meurgêr (150). Dreist da zaspazh postoù micherioù ar c'helenn (a zo stag-kenañ ouzh


⁵ Diazevadur Publik a Genlabour Etrekumunel (EPCI e galleg).

dasparzh ar skolidi divyezhek), ar pezh zo dedennus gant ar gartenn-mañ eo **gwelet pelec'h emañ ar postoù er-maez eus tachenn ar c'helenn**. Merzout a reer evel-se toleadoù m'eo brasoc'h eget kustum pouez ar micherioù-se (1/3 eus ar postoù pe muioc'h) : Roazhon Meurgêr (35%), KTK bro Landerne Daoulaz (40%), Sant-Brieg Arvor Tolpad-kêrioù (35%) hag a-hed ur gouriz a ya eus KK bro ar C'hab betek KK Kreiz-Breizh (ennañ Kemper Breizh-Izel ha Poc'hêr kumuniezh).

Sifroù pennañ an 10 DPKE kentañ diouzh an niver a bostoù brezhonek

	Postoù KILA rontaet e 2022	Pouez an DPKE e dasparzh ar postoù
Brest Meurgêr	200	11%
Kemper Breizh-Izel	155	8%
Roazhon Meurgêr	150	8%
An Oriant Tolpad-kêrioù	120	7%
Mor Bihan - Gwened tolpad-kêrioù	115	6%
Gwengamp-Pempoull Arvor-Argoad Tolpad-kêrioù	105	6%
Lannuon-Treger Kumuniezh	85	5%
Poc'hêr kumuniezh	80	4%
KTK bro Landerne Daoulaz	70	4%
Naoned Meurgêr	70	4%

Dasparzh dre gumun



Er gartenn amañ a-us e weler ez eo stankoc'h ar postoù-labour brezhonek e kornôg ar vro. Gronnet e vezont tro-dro da bolioù kêrel alies. Dibaotoc'h int en Il-ha-Gwilen, dreist-holl pa bellaer diouzh Roazhon ha, gwashoc'h c'hoazh e reter Aodoù-an-Arvor hag el Liger-Atlantel er-maez eus an daouad Naoned - Sant-Ervlan.

En dasparzh-se e anavezet war un dro levezon rouedadoù ar c'helenn divyezhek hag hini poblañsouriezh Breizh.

Sifroù pennañ an 20 kumun kentañ diouzh an niver a bostoù brezhonek

	Postoù KILA rontaet e 2022	Pouez ar gumun e daspazh ar postoù
Roazhon	135	7%
Kemper	115	6%
Brest	95	5%
Karaez-Plougêr	80	4%
Gwened	70	4%
Landerne	60	3%
Lannuon	40	2%
Naoned	40	2%
Releg-Kerhuon (ar)	40	2%
Oriant (an)	35	2%
Plougastell-Daoulaz	35	2%
Sant-Ervlan	30	2%
Plijidi	30	2%
Sant-Brieg	25	1%
Lesneven	25	1%
Ploneour-Lanwern	20	1%
Montroulez	20	1%
Gwengamp	20	1%
Rostrenenn	20	1%
Alre (an)	20	1%

Roazhon (135 post KILA), **Kemper** (115) **ha Brest** (95) **eo an 3 c'humun gentañ** evit an niver a bostoù brezhonek. Merzout a reer ivez pouez dreist kêrioù evel Karaez (4^e kumun bed al labour e brezhoneg, a-raok Gwened pe Naoned) pe Rostrenn hag, er c'hontrol, pouez bihan Sant-Brieg pe Sant-Maloù.



An tachennoù labour ma enfreder brezhonegerien

Pa urzhier ar postoù n'eo ket diouzh ar rummoù micher ken met diouzh tachenn labour an implijer⁶ ez eo kadarnaet c'hoazh dreistpouez ar c'helenn.

Tachenn **ar c'helenn er skolioù** 1^{añ} hag eil derez (kelenn divyezhek dreist-holl) eo an hini bouezusañ gant 1300 post, da lavaret eo tremen 70% eus hollad ar postoù. Da-heul emañ tachenn **ar velestradurezh foran** (strollegezhioù tiriadel dreist-holl), enni 135 post (7%) met ul lodenn vat anezho (tost an hanter) zo postoù GWATASMed⁷ a labour er skolioù 1^{añ} derez e gwirionez. An 3^e tachenn eo hini **ar c'helenn er-maez eus ar skol**, goude ar vachelouriezh dreist-holl, gant 120 post bennak (7%).

A-hend-all e kaver tachenn **ar c'hleweled** gant 90 post (5%), a-raok hini **ar buheziñ sevenadurel**⁸ gant 80 post (4%). Tost da 50 post (3%) zo war dachenn ar **servijoù d'an dud** ha sellet a reont holl, koulz lavaret, ouzh an degemer bugaligoù. An nebeud postoù a chom zo rannet war tachennoù all (arz, embann, kenwerzh, servijoù, h.a.).

Postoù-labour stabil e-barzh frammoù padus

Diouzh ar roadennoù hon eus dastumet, **tremen 4/5 eus ar postoù-labour KILA renablet e 2022 zo stag ouzh ur gevat didermen** pe ar statud gwazour (83%). An tachennoù a ginnig an nebeutañ a stabilded d'al labourerien eo an arzoù (31% a gevatoù didermen), ar c'hleweled (57%) hag ar servijoù d'an dud (64%).

Evit ar pezh a sell ouzh statud ar frammoù, **er velestradurezh foran emañ tremen 1 200 eus ar postoù KILA renablet**, da lavaret eo tost an 2/3 eus an hollad (65%). Ar wazourien-se o deus ar statud kargiad pe ur gevat didermen peurliesañ pe e labourfent evit un hentad divyezhek⁹, pe e labourfent evit ur strollegezh tiriadel. Ar braz eus ar postoù-se (1 000 post diwar 1 200) a sell ouzh an Deskadurezh Stad en resis (postoù kelennerien ar publik ha postoù kelennerien kevratet e Diwan hag en Deskadurezh katolik). **Eil statud boutinañ ar frammoù eo hini ar c'hevredigezhioù gant tost da 550 post** (29% eus an hollad). Kevratoù didermen zo gant 59% eus an dud enfredet war ar postoù-se. Embregerezhioù pe emembregerezhioù eo a zegas ar 100 post bennak a chom. Breskoc'h eo statud al labourerien vrezhonek er frammoù-se keñveriet gant ar re a labour e stern ar velestradurezh foran (kalzig a astalerien a gonter da skouer).

⁶ Da lavaret eo pa gonter post sekretour ur gevredigezh kerent er c'helenn, pe post un teknikour eus France 3 er c'hleweled, da skouer.

⁷ Gwazour Tiriadel Arbennik ar Skolioù-Mamm (ATSEM e galleg).

⁸ Un diforc'h a zo etre ar "buheziñ sevenadurel" evel tachenn labour an implijer (enni holl bostoù ar frammoù a bled gant an dachenn-se, kevredigezhioù dreist-holl) hag ar rumm micher "sevenadur" (enni postoù buhezourien, dastumerien, troourien), ha pa adkavfed postoù zo en 2.

⁹ An darn vrasañ eus ar skolioù prevez zo dindan kevrat gant ar Stad ha, da-heul, e vez gopret o c'helennerien gant homañ.

Peadra evit 2 000 post-labour e 2022 ha muioc'h c'hoazh en dazont

Estreget ar postoù-labour a zo brezhonegerien warno e kaver, gant hon enklask, roadennoù war an niver a bostoù ouzhpenn a vefe talvoudus kaout brezhonegerien warno. 170 post a seurt-se a vefe hervez ar pezh zo bet embannet er respontoù dastumet, ar pezh a dalvez **e vefe peadra e 2022 evit kaout d'an nebeutañ 2 000 post KILA e bed al labour e brezhoneg ma vefe bet kavet yezherien evit pourveziñ an holl bostoù.**

A-hend-all, an emglev Stad-Rannvro nevez¹⁰ a laka palioù resis e-keñver diorren ar c'helenn brezhoneg er skol a-benn 2027. Ar palioù-se a vez sifret a-wechoù gant skolidi ouzhpenn da stummañ, ar pezh a dalvez **kelennerien ouzhpenn** dre ret. Gallout a reer jediñ evel-se e talvez ar pal kaout 30 000 skoliad divyezhek e 2027 (mellad 7 an emglev) krouiñ etre 650 ha 700 post kelenner divyezhek dindan 6 bloaz. Ouzhpenn-se ar palioù lakaet evit mont war-zu hollekaat kelenn ar brezhoneg er 1^{añ} derez en akademiezh Roazhon (mellad A14 an emglev) a dalvez stummañ d'ar yezh 800 emeller diavaez bennak pe 6 300 skolaer unyezhek. E-se, ma vefe pourvezet an holl bostoù a vefe talvoudus kaout yezherien warno, e tlefe bed a labour e brezhoneg kontañ 3 550 post KILA e 2027 ma n'eo ket 9 100.

Klozadenn : ledanaat ar c'hinnig labour

Tost da 1 850 post-labour KILA a c'houlenñ gouzout ar yezh bremañ, ar pezh a ro an tu da lavaret **eo “ar brezhoneg” unan eus implijerien vras Breizh**. Ha lañs zo gant an implijer-se, war ar marc'had, dre ma kresk buan an niver a bostoù kinniget gantañ e pep rumm micher hag e pep departamant (kresket eo pouez an Il-ha-Gwilen en dasparzh un tamm).

Ouzh micherioù ar c'helenn eo stag 4/5 eus ar postoù renablet e 2022, evel e 2012. Resisoc'h e c'haller lavaret e klot 1 post diwar 2 gant ar vicher skolaer divyezhek. Heverk eo e vefe chomet damheñvel dasparzh ar postoù etre micherioù ar c'helenn hag ar micherioù all : ha pa vefe douget bed al labour e brezhoneg gant diorren ar c'helenn, lusk zo gant ar metoù all ivez. Neoazh, ne weler ket micherioù nevez o kemer pouez er bed-se, na tachennoù nevez ma vefe ar yezh oc'h en em ledañ.

Kenderc'hel a raio an niver a bostoù brezhonek da greskiñ er bloavezhioù da zont ha gant ar c'helenn e chomo an tu kreñv. Evit suraat dazont ar yezh eo pouezus e vefe digarez ingal d'he gwelet ha d'ober ganti er vuhez pemdez. Seul dalvoudusoc'h eo e kendalc'hfe an niver a bostoù da greskiñ er rummoù micher all ivez neuze, estreget hini ar c'helenn. Tachenn ar strollegezhioù foran, da skouer, pe hini ar c'hleweled a ya mat war-raok ha tachennoù strategel int. Pouezus-kenañ eo avat ez afe war greñvaat lodenn metier all m'eo dibaot c'hoazh gwelet pe klevet brezhoneg : ar c'henwerzh, ar yec'hed hag ar servijoù. Kalz a frammoù er metoù-se ne verzont ket c'hoazh talvoudegezh ar brezhoneg evit ar servijoù a c'hallont rentañ d'ar boblañs. Un arouez a-zoare eus kalite o servijoù pe o froduioù e c'hall bezañ an divyezhegezh, koulz hag un doare aes da gadarnaat o dibarded en ur marc'had bedelaet, da skouer.

Eus an tu all, muioc'h-mui a dud yaouank a zeu er-maez eus an hentadoù divyezhek ha war liesaat ez a ar stummadurioù hir abaoe tremen 20 vloaz. Stank e kaver tud c'hoant ganto labourat e brezhoneg, met n'int ket holl dedennet gant labourat war dachenn ar c'helenn avat. Ouzhpenn-se, n'eo ket anavezet a-walc'h c'hoazh gant ar braz eus ar boblañs e c'hall ar brezhoneg degas fred.

¹⁰ Kendivizad a-ziforc'h evit treuzkas yezhoù Breizh ha diorren an implij anezho er vuhez pemdez 2022-2027.

Sifroù pennañ

- **1 850 post-labour** brezhonek KILA a oa d'ar 01/01/2022.
- **550 post nevez** bennak zo bet **krouet** etre 2012 ha 2022, da lavaret eo ur c'hresk un tamm brasoc'h eget +42% en ur ober 10 vloaz.
- Tremen 4/5 eus ar postoù renablet zo stag ouzh ur gevrat didermen (83%).
- **Tost 1 500 post a glot gant micherioù ar c'helenn**, da lavaret eo 4 fost diwar 5 (1 476 post en resis, +46% e-keñver 2012) : 901 anezho zo postoù kelennerien er 1^{añ} derez (+49%) ha 212 en eil derez (+11%, n'eus nemet e Diwan eo kresket an niver a bostoù en eil derez).
- Gant 200 post bennak ez eo ar **merañ frammoù** an eil rumm micher pouezusañ.
- **Penn-ar-Bed** eo an departamant ennañ ar muiañ a bostoù (900 post bennak).
- **An Il-ha-Gwilen** eo an departamant m'eo kresket ar muiañ an niver a bostoù etre 2012 ha 2022 (+78%). An departamant m'emañ ar postoù en o liesseurtañ eo ivez (kontañ a reer 26% a bostoù er-maez eus micherioù ar c'helenn).
- **Bro Gerne** eo ar vro he deus tapet ar muiañ a bostoù ouzhpenn (+127 en ur ober 10 vloaz).
- **Brest Meurgêr** eo an DPKE ennañ ar muiañ a bostoù (200 post, 11% eus an hollad).
- **Roazhon** eo ar gumun enni ar muiañ a bostoù (135 post, 7% eus an hollad).

